

AR PILLAOUER



Va zad en deuz va dimezet
 D'eurc'hoz fléris pillaouer ; (diou wech)
 En Lokewret ez eo ganet
 En komanant Toul-al-Laër

DISKAN

Fœi, fœi, fœi war va zammig ôtrou,
 Gant e stoup hag e billou !

Tri devez goude va eured
 E oa foar en Landerne, (diou wech.)
 Ha va lapous, prim dihunet,
 A zaill eméz e wele.

Drailla'ra eun hanter pater,
 Tana'ra e gorn butun ; (d. w.)
 Tapout a ra e grog-pouezer
 Evit mont war hent Sizun.

Pa oa an hanter-noz sonet
 E Iliz vraz ar Fouille,
 Mé oa eun intanvez glac'haret,
 Va unan'barz va gwele.

Kavet en doa kamaraded
 En eur vont da billaoua ;

E holl arc'hant en doa fouetet
 Ha tamm pillou'bet n'hen doa ! . . .

Pa c'ha Yannig d'ar pardonioù
 Bewech e vez mezo-dall ;
 Prest a oa da goll e vragou
 En Lokewret, an de all . . .

Pa zeuio ar c'hiz er vro-man
 Da derri an dimezioù,
 Me a c'haio en eur gana
 Pell deuz pôted ar pillou !

Pa zeuy karigel an Ankou
 D'ober he zro er vro-man,
 Me a redo war he roudou
 Hag hen pedo d'hen samma.

P'hen devo an Ankou boutet
 En toull, ar c'hoz Pillaouer,
 Me a c'haio en eur gana
 Da gomanant Toull-al-Laër :

DISKAN

Maro é va zammig otrou,
 War e stoup hag e billou ! . . .

— 4 —

Komzet'vo d'an otrou Person
 Deuz ar flénius Pillaouer
 'Vit ma kano al « liberou »
 Hag ouspenn al *Lip-e-rér* !...

DISKAN

Maro é va zammig otrou
 War e stoup hag e billou !...

Son ar *Pillaouer* a zo bet savet a greder enn tri-ugent vloa benak'zo gant an O. Bodeur, bet person en Lokewret en Kerne-Uhel. Deut eo da veza anavezet kazi dre-holl elec'h ma komzer brezoneg.



Gwillou Rouz, mab ar Bleiz
 En deuz drebet kant barr heiz ;
 Eur bodezad bara draillet,
 Ha c'hoaz na oa ket hanter-garget ;

Eur chidourennad youd,
 C'hoaz e lavare na oa ket boud ;
 Hag eur varazad lèz kaouledet
 Ha c'hoaz na oa ket kreunvet ;

Hag e lavare e vamm :
 — « Klanv eo Gwillou pa na zreb tamm ? »

